

Kantik Santez Barba.

War don : *Bosen Elliant*

DISKAN (1) :

*Santez Barba, hon fatronez,
Plijet genac'h 'n ho madelez
Pedi evidomp Hon Zalver,
M'hon divallo en peb danjer.*

Ni gar, o Merzerez santel,
Dont da zaoulinan d'ho chapel ;
Pa bedomp dirag ho skeuden / 3/
E ve nerzusoc'h hon feden. /

Ezom hon euz e peb mare
Euz ho skoazel dirag Doue.
Deut d'hon diwall euz ar poaniou
A denn warnomp hon fec'hejou.

En arne braz, pa c'homp spontet
Gant ar gurun hag al luc'hed,
Warnomp holl astennet raktal
Ho torn gallouduz, d'hon diwall.

Pa rankomp kuitât ar bed-ma,
Deut d'hon zikour, Santez Barba,
Gant aoun, siouaz ! na vemp neuze
Skoët gant dorn justis Doue.

P'e gwir ho kalloud zo ken braz,
Eur c'hrass a fell d'imp goulen c'hoaz :
Miret an dud hag ho madou
Deuz an tan-gwall hag he reuziou.

O ni ho ped, Santez Barba,
Goulennet 'vidomp dreist peb tra
Ma vefomp harzet da gouezel
En kreiz ar flammou eternal.

Ho pedi a reomp c'hoaz ouzpenn
Da ziwall ar vengleuerien ;
C'houi eo, 'n ho micher danjeruz,
Ho fatronez trugarezuz.

Pa vo tostik fin hon amzer,
Goulennet digant Hon Zalver
Ma vefomp maget, kent mervel,
Gant he gorf hag he voad santel.

(1) Goulennou an diskan hag ar c'houplad divezan ve graet evidomp gant an /iz da vouel ar Zantez.